

l'ère de Bayon

DIVIZ

EVIT

GOULENN EUR VERC'H DA EUREUJI.

AR GOULENNER E TOULL ANN NOR.

Deiz-mad d'e-hoc'h holl, tud ann ti-man,
Kel laouen ho kavann,
Ker brao gwisket e pep fesoun,
Ma lavar d'in stok va c'haloun
N'hellinn bikenn tremen ho ti,
Hep dont d'ho saludi.

ANN DIFENNOUR, WAR ANN TREUZOU.

Ni a zoug ar memes salud
D'e-hoc'h-hu koulz ha d'ho tud;
Ann honestiz euz ho komzou,
Ar bervik dous euz ho selliou
A lavar d'e-omp skler hag hanad
Hoc'h euz eur c'helou mad.

AR GOULENNER.

Ni'zo warlerc'h eur goulmik wenn
Gwall dizet gand eunn tenn.
He askel gleiz a zo torret,
Nijal mui pell na oufe ket,
Hag hon euz klevet eo ama
Ema deut da goueza.

ANN DIFENNOUR.

Mar d-eo koulmed a c'houlennit,
 It d'ar maner da vit ;
 Dre-ma, war ar meaz gan-e-omp-ni
 N'euz nemet piked ha brini ;
 Hogen eur gaou a livirit,
 Eunn dra all a glaskit.

AR GOULENNER.

Klask a rann eul louzaouen fin
 Da lakât em jardin ;
 Eul louzaouen mad ouz ar bles
 Great gant birou ar garantez ;
 Hag e kleviz, deac'h diveza,
 He c'haychenn er gear-ma.

ANN DIFENNOUR.

Ar fourdelizen a glaskit,
 Siouaz d'e-omp ! eat eo kuit.
 Ema brema e Kemperle
 Er gouvant o veuli Doue ;
 Koantoc'h eget eur bodik roz
 E liorz ar baradoz.

AR GOULENNER.

Nann, va mignoun, n'ho kredann ket.
 Doue en devez gret
 Evid ar vered ann ivin,
 Evid al liorz al louzou fin,
 Hag Annaik da laouenât
 Kaloun eur pried mad.

ANN DIFENNOUR.

Evel ar gliz war ar prajou
 E tired ho komzou.
 Treuzi a reont dor ann ti—ma
 Evel ar mel eunn tamm bara.
 Da beur—ober ho kefridi,
 Den iaouank, deut enn ti.

ABARZ EN EM LAKAAT OUC'H TAOL, AR GOULENNER A LAVAR,
 HEP KANA :

Pa'z ounn deut d'ober ar vicher
 A reaz gwechall Eliezer,
 E livirinn, tud a enor,
 Eur gerik d'e-hoc'h euz he histor.

Karget a oe gand Abraham
 Tad Izaak den iaouank-flamm,
 Da choaz eur pried da he—ma
 Euz a douez tud ar re wella.

O veza 'ta pedet Doue
 Da vennizien ann afer—ze,
 Ec'h erruaz eeun ha divank
 El leac'h m'edo ar plac'h iaouank.

Pedet a oe da vont enn ti,
 Kenniget d'ezhan da zibri ;
 Hogen hen a lavaraz krenn :

« Na zebrinn ket eur vruzunen
 « Ken n'am bezo danevelet
 « Evit petra ounn digaset.

« Doue en deuz roet he vennoz,
 « Madou hag enor d'am mestr koz ;

- « Ha Sara e deuz roet d'ezhan
 « Eur map ha n'euz ken nemet-har.
 « Va mestr en deuz great d'in toui,
 « O lavarout : na gemeri
 « Bikenn eur c'hreg d'am map penn-her
 « Euz a douez merc'hed he garter.
 « Kea huan etrezek va bro,
 « Ha na zistro ket ac'hano,
 « Hep digas d'am map eur vestrez
 « Hag a vezo euz hol lignez. —
 « Dre c'hras Doue em euz kavet
 « Ar verc'h iaouank a zo galvet
 « D'ober eurusded va mestr ker ;
 « Komzit ma tistroinn d'ar ger. »

Ober Doue eo kement-ma,
 A respontaz tud Rebeka ;
 Rak-se n'hellomp ket enebi,
 Pa fell d'ezhan koulz ha d'ezhi.

Ah mad ! evel Eliezer
 Me renk gouzout penn d'am aser ;
 Ha kent en em lakât ouz taol,
 Me renk beza sur euz va zaol.

Diskouezit 'ta, tud ann ti-ma,
 Diskouezit d'e-omp ho Rebeka,
 Ma'z aimp pelloc'h da eureuji
 Daou zen pell-zo o huanadi.



MA EZ EUZ AMZER, HA MA EMA ANN DUD E DOARE
FARSAL, ANN DIFENNOUR A ZALC'HO MAD, HAG A LAVAR
ENN EUR GANA :

Gortozit 'ta eunn nebeudik,
Ma rinn eur baleik,
Da c'houzout hag hen zo enn ti
Eur plac'h bennak da zimezi.....

(ENN EUR ZIGAS EUR VAOUENZ GOZ,)

Chetu unan a ziaze,
Mar d'eo diouc'h ho toare.

AR GOULENNER.

Ouz ar c'hreg fur-ze pa zellann,
Hep aoun e lavarann,
E devez great mad he labour,
Gwisket he zud, maget ar paour ;
Mes ar pez e deuz great pell-ze,
Eunn allik her graio.

ANN DIFENNOUR, O KINNIGA EUR C'HREG IAOUANK.

Chetu ama unan ker gae
Hag ann heol da viz mae ;
He diou chod zo diou gerezen,
He daoulagad zo diou weren
Hag a zo da ziuall out-ho,
Hou-nez eo sur ho tro.

AR GOULENNER.

Ia, va mignoun, ann dremm lemm-ze
Eo dremm hor c'harante ;

Mes me gred eo dija poazet
Ouz ann darbot he bezied ;
Ha mar d-eo ker ruz he chod klei
Eunn all'n deuz poket d'ei.

ANN DIFENNOUR, O TIGAS EUR PLAC'HIK VIHAN.

Nag ann ealik-ma da Zoue
Hag ho koulenn a ve ?
Plac'hik iaouank savit ho penn,
Da zellout ouz ar gristenien ;
Ho lagad glaz, ho pleo melen
Na raint ket drouk da zen.

AR GOULENNER.

Gand ann heol tomm hag ann amzer
Ec'h aoua ar mesper....
Bloaz-so ann hini a glaskann
A oa glaz-dour evel hou-man,
Hirio e tistag euz ar brank
War zin eunn den iaouank.

ANN DIFENNOUR.

Va mignoun, n'euz den evid-hoc'h ;
Rak-se greomp ar peoc'h.
Chetu ar verc'h a c'houlennit ;
Hogen, den iaouank, diouallit
Na ve bikenn kerse gant-hi
Beza kuiteet he zi.

AR GOULENNER D'ANN DEN NEVEZA.

Didostait eta, va mignoun,
Euz a greiz ho kaloun,

Da zigemerout ho pried,
 Ha dalc'hit mad d'ezhi bepred;
 Eunn askorn eo euz hoc'h eskern
 Hag eunn eil da espern.

SON MIZ EVEN. (1)

Gwechall, e bro Gwenet hag e Kerne, ann dud iaouank em zastume, bep bloaz, enn eunn dachen vraz bennag e k ar c'hoajou, da ober ar pez a c'halvent *fest miz even*. Pep iaouank a zigase gant-han eur boked. Neuze, ar merc'hed eunn tu, hag ar baotred enn tu all, e lekeent ho bokedou eur roc'h. Ar bokedou kenver-ha-kenver hag a c'houmre bella hep gouevi, a verke ann daou zen iaouank hag en gare ar gwella. Bep bloaz e vije choazet daou zen iaouank batroum ha da batrounez d'ar fest. Ar re a vije bet choazet bloaz araok, a zigore ar fest enn eur gana: *de-mad d'hoc'h koumerez etc.*; hag ann daou a vije choazet d'ann deiz-sachue ar gouel o kana war ar memez ton: *erru ann n amzer, etc.*

ANN TAD-PAERON KOZ.

De-mad d'hoc'h-hu, koumerez, de-mad d'hoc'h a larann,
 Dre gemenn ar garantez (2), ta la ri ta la la,
 Dre gemenn ar garantez, ounn deut hirio aman.

AR VAMM-BAERON GOZ.

Na gredit ket, den iaouank, e venn dimezet d'hoc'h,
 Evid eur walen arc'hant am euz bet digan-e-hoc'h.

Dalit ho kwalen arc'hant ha gen-e-hoc'h kasit-hi,
 N'em euz mui a garantez na'vid-hoc'h na'vit-hi.

(1) Tennet euz a Varzaz-breiz ann aotrou DELAVILLEMARQ

(2) Dre urz ar garantez.

Bet am euz bet eunn amzer a zo d'in tremenet.
 b a vousec'hoarze d'in-me, me her c'hare meurbed.
 Hogen deut eo ann amzer, randaela ouz-in,
 hoarzin d'in neb a garo, evid-oun ne c'hoarzin.

ANN TAD-PAERON KOZ.

Gwechall, pa oann den iaouank, me zouge teir zefenn,
 an wer, hag unan c'hlaz, hag heben a oa gwenn.

Ann hini wer a zougenn'n enor d'am c'houmerez,
 h he c'harout em c'haloun, hag e pep gwirionez.

Ann hini wenn a zougenn rag heol ha goulou-de,
 oerk d'ar c'hlan-garantez a oa tre hi a me.

Ann hini c'hlaz a zougenn da gaout peoc'h ato,
 pa zelann diout-hi, e tennann huanado.

Dilezet ez ounn siouaz ! Siouaz ! Brema gant-hi,
 I gand eur goulmik skalpenn ema eur c'hoz-kouldri !

AR PAERON HAG AR VAEROUNEZ NEVEZ.

Erru ann nevez-amzer enn dro gant miz even,
 ge teu ann dud iaouanck da vale' pep tachen.

Ar bleun ebarz ar prajou hirio zo digoret,

kaloun ann dud iaouank ive' pep korn ar bed.

Chetu ar bleun er spern gwenn, ha gant-han c'houez ker mad
 gal labouset munud a zeu d'en em barat.

Deut-hu gan in, n a dousik, da vale d'ar c'hoajou,
 a glevo ann avel o krena enn deliou.

Ni a glevo ann avel o krena enn delio,

g ann holl evned ken kaer, war ar gwez a gano.

Pep hini enn he zonik, pep hini enn he don,

oi fréalz d'hor spered, levenez d'hor c'halon.